

# KANAOUEN AR PESKETAERIEN

D'AR VERCHEZ

1.

Hor c'hanaouen a zo dister ;  
Ni zo pesketaerien baour ;  
Hor guiskamant na dal diner,  
Mes hor peden a dal aour.

**Diskan.**


Messaït hor bagik vihan  
A enep ar goal amzer ;  
Mar he diouallit, peb unan  
A lavaro pemp *Pater*.  
Enn hoc'h henor, inamm dener,  
Ni lavaro pemp *Pater*. (*bis.*)

2.

Ar pesketaer gant he vagik  
A dle dont abars tri dez :  
Mes aliez ar reuzeudik,  
Er mor doun e kav eur bez.

3.

Mar teu ann avel da grozal,  
Bezit mamm d'hor bugale ;  
N'ho deuz nemet hoc'h d'ho dioual,  
Pa na vezimp ket ganthe.



4.

O Mari, o douz stereden,  
Var hon daoulin ni ho ped ;  
Ah ! renit bepred hon gouel ven  
E kreiz ar mor kounaret.

5.

Hor c'halon mantret gant glac'har  
Er vro-ma e huanadomp,  
Pell deuz ann Env, pell deuz ar c'hloar,  
Siouaz d'imp en em gollomp.

6.

O Mari, mamm tener meurbed,  
Euz ann oll pesketaerien,  
O Guerc'hez Vari benniguet,  
Pellait diouzomp peb anken.

7.

Pa vo deut hon heur diveza,  
Goude trevel ar vuez,  
Ni garfe, o mamm ar yuella,  
*Bea* gant ar zent, ann elez (vel *Bout*).

8.

Ar pesketaer kez eo ho ped :  
Digorit d'ezhan ann or,  
Er Baradoz her recevet,  
Douz stereden euz ar mor !

**Imprimatur :**

Quimper, le 5 Juillet 1905.

F. CORRIGOU, Vic. gén.

---

Kemper, moulet e ti DE KERANGAL, mouler ann-Eskoptil.